

— 55 —

SONNEN GOH

**Sonnen en iverézed kafé  
hag en iverion guin**

(Ar en ton e gaveet er braùan)

Tosteit ol koh ha ieuank de gleuet ur soñnen,  
Ha ne hues chet hoah kleuet rauk ma oé er blé-men ;  
En iverézed kafé hag en iverion guin  
En des hé bet kompozet eit gobér d'oh hoarhein.

II

É barh er blé mil eih kant unan ha deu uigent  
Oé saüet ur fachemant goudé gouil en Ol-Sent,  
Etré ur voéz hag hé dén hag en um demalé,  
Unan 'balamor d'er guin, en aral d'er hafé.

III

Er voéz e ias barh é kër get ur boeselad ed ;  
P'hé doé guerhet hé sahad hi glask komèrezed.  
— Damb-ni bremen d'er hafé, e laras Jacketant  
Ha me ia d'hou regalein p'en dé guir 'm es argand.

IV

Pe antréant ér hafé, Jacketant ha laret :  
— Mé e gred get hon argand é veemb chervijet ;  
Degaset d'emb ni kafé hag eùé l'eau-de-vie,  
Hag ur vouteillad likeur aveit um régali.

V

Er l'eau-de-vie, er likeur e saüas èn ou fen  
Hag ind komans de zansal, ou fedér, diarhen. (1)  
Ha Jacketant e laras : « Me argant zo fouètet,  
Hoah 'iveen ur baneh, rak hoah em es séhed. »

(1) divoteur.

## VI

En ostizéz e gleuas ha d'er gampr' doé pignet,  
 A pe oé péiet en treu e choment rest ur skoued.  
 \* Bremen en um aranjet de béein hou skoden  
 « Rak eidonn-mé, m'er lar d'oh, ne daulein ket termen. »

## VII

Er pedér moéz um sellé hag en devoé poén pen,  
 N'ou doé ket argant erhoalh eit péein ou skoden  
 Oeit Jacketant ha laret : « Mé e rei men dantér  
 « Ha hui me homèr Jannet, hui rei hui hou mouchoér. »

## VIII

En dén e oé barh er gér hag en devoé kleuet  
 En doé dispignet é voéz tro ha tro de bear skoued ;  
 Kuitat e hras é labour aveit monet é kér  
 Ha barh en ostaleri ou havas ou fedér.

## IX

Pe antréas ér hafé, ean oeit ha lavaret :  
 « Ne chuéhes tam é ivet, lar d'ein moéz dibordet,  
 « Te léz hor hroèdur bihan genein de huchellat ;  
 « Chetu en dervet noz-so n'em es kousket tapad. » <sup>(1)</sup>

## X

— Azéet 'ta étalonn ha reit peah emé-hi,  
 Keméret ur huéh kafé eit distrèh hou soursi.  
 — Me malloh e ran d'oh rah get hou koh deur berùet ;  
 Me garehé, ar é lerh hou kuélet rah skoset !

## XI

— O sah er guin. emé hi, hui zispriz er hafé,  
 Ha barh en ostaleri ' veh kavet noz ha dé !  
 Rah er péh e houniet épad ol er suhun  
 N'hou pé ket rè anehè aveit guin ha butun.

## XII

— A Jacketant, emé-ean, bremen ni hrei er bal ;  
 Goudé dispign me argant donet hoah d'em zemaal.  
 Ha ean, get un taul arfleu, de gavet é voéz keh.  
 Hag hé diskaret d'en doar kafé, koèuen ha Leah.

1) tam erbet.

— 57 —

## XIII

Er groagé e lavaras ou fedér asambles :  
 -- Manket e hues, me mignon, monet de skoein hou moéz;  
 Skuillet e hues er hafé ha hui ia d'er péein,  
 Petremant, a dra serten, ni ia d'hou tivlèuein.

## XIV

Er peder moéz malisius e blantas arnehon  
 Hag en ostizéz geté, furiet hé halon.  
 Stleijet é bet dré en ti, é zillad rah renget,  
 E zivréh, bet é ziskoé, get er hafé grilllet.

## XV

A p'en doé kavet é du ean en doé achapet  
 En ur sellet ar é lerh avel ur hah fouètet.  
 — Dau é d'ein bet, emé ean, gozik kol mem buhé :  
 Mat vehé ' vehé béet ol merhed er hafé.

## XVI

Raksé hou avertisan goased ag er hontré  
 Nen dé ket de glah hou moéz drest pep tra d'er hafé ;  
 Mar hues guerh ur vouteillad, pé diù, én hou kodel  
 Kerhet d'en ostaleri de gavet Iann Fourdel.

## XVII

Pe ven én ostaleri. get me hameraded  
 Ur podad guin étalonn. ' vé koutant me spered ;  
 Arsa ' ta, me amied, ivamb beb a vaneh  
 Ha kañnamb er soñnen men, estroh aveit ur hueh !

*Dastumet get J. L. ER GALLEU, a Sant-Inan.*

---

 Ar bé ur voéz ieuank
 

---

*Er marù en des falhel me ieuankiz en hé bleu ;  
 Me laro d'oh perak, mar karet me cheleu,  
 Doué e vennas asten e'donn en neùé-han,  
 Ha pellat azohein barradeu er gouian.  
 Pried a garanté, distannet d'er glahar  
 E boah hou kalon beur, séhet téhmat hou tar :  
 Pen dé guir, é verùel, é onn deit bet en Né,  
 Laret benoh d'er marù ha trugèré de Zoué.*

(Diar er galleg)